

— 4 —

Ar follentez euz'va buez
 Ha va direolamanchou
 So caus'eus ho tristidiguez
 Ac eus oc'h oll soufrançou.

Jesus ! Jesus !

Grit d'in scuill eur mor zaelou
 Var va buez malheurus.

Gant ar goad eus ho corf divin
 Me garfe quemesq va goad ;
 Mæs eus ar c'hraç-seoun indin
 Rac bet e zoid re ingrat.

Jesus ! Jesus !

Ah ! sellit a druez ouzin ;
 Pardon, pardon, va Jesus !

Mil goech em eus ho trahisset
 Evel an treitor Judas ;
 Evel Per em eus ho nac'het,
 A disanavet siouas !

Jesus ! Jesus !

Bezit truezus em andret :
 Pardon, pardon, va Jesus !

Certen e vijen bet collet
 Panaved an drugarez
 Gant pehini oc'h eus souffret
 Evidon-me pec'her quæz.

Bennos ! Bennos !
 Va Jesus ! ra viot meulet
 Er bed ac er Barados.

Evelse bezet græt.



Kemper, mouillet e ti de KERANGAL.

ANGONI JESUS ER JARDIN OLIVET


J. Malmeire
VAR TON : Gant ar goad scuill va Salver.

Hbars er Jardin Olivet
 Antreomp varlee'h Jesus ;
 Contemplomb Redemptor ar bed
 En e angoni poanius :
 E galon beuzet er glac'har,
 E zaoulagad en daelou,
 Eo pleguet betec an douar
 Dindan poez or pec'hejou.

Pebeuz burzud a garantez !
 Cett Mestr bras an envou
 Enem samet dre drugarez
 A lousdoni or c'rimou.
 Pebeuz sam a boez varnezan
 Ar pec'hejou tremenet,
 Ar re a gommetter brema,
 Ac ar re vo commette !

Adalec ar pec'het quenta
 Eus hon tad Adam guechall,
 Betec ar pec'het diveza
 Eus an diveza den fall,
 Var e guein ho guelan berniet.
 Pebeus sam a bec'hejou !
 Goudeze bezit estonet,
 Mar scuill quement a zaelou.

Pec'her, te ac'h eus er grisquet
 Eus a lorniez da grimou ;
 En dro dezan ec'h eus scoulmet
 Eur c'houris a bec'hejou.
 Penaus ec'h eus dishenvelet
 Un Doue santel ha pur ?
 Cetu ar froues milliguet
 Eus da galon dinatur.



En eur stad quer vil, quen euzus,
E Dad en deus heug ounthan ;
E zaoulagad carantezus
A zistro divarnezan ;
Diaguent e vuya caret
A complezanç e galon,
Jesus brema so an objet
Eus e valediction.

Evit ma vije assureret
Eus an arret solanel,
En deus douguet en e enep
E tigaç dezan un ael,
En e zorn eur c'halir c'hoero,
Leun eus a ly or c'hrimou,
Ac en e voelet ar maro,
Froues trist or pec'hejou.

O velet ne voa mui moyen.
Da douch e Dad coleret,
E teu da gaout e zisquibien,
Allas ! ac ho c'haf cousquet.
Dilezet eo en abandon
Gant an dud a gant e Dad,
A nep-tu consolation :
Doue pebeus calonad !

Soudent dicoutho e pella,
Ac e commanç a nevez.
Da hirvoudi ha da voela,
Gant ar spont ac an encres.
Arauc an tourmanchou garo
So evithan preparet,
Circonstanç ebet anezo
Ne all echap d'e speret.

En amzer eus e bassion
E souffro, a dra certen,
Poanion bras, cals confusion,
Mæs an eil goude e ben.
Ama ho zant oll assambles
Evel bleizi arraget ;
En eur mor a dristidinez
E galon a so beuzet.

Enem velet a ra guerzet
Gant Judas, an treitour fall,
Gant Per memeus e zeo nac'het,
Dilezet gant ar re all.
Deja e sant ar scourgezou
O tispenn e gorf santel,
Ac ous ar groas he vemprou
Staguet gant tachou cruel.

Er guel a guer bras tourmanchou
Ec'h antren en angoni ;
Mæs ar pez a gresq e boaniou
E zeo hon ingrateri :
Pa vël quement a souffrançou
Collet evit ar pec'her,
Ar goad eus e oll vemprou
Var an douar a ziver.

Deut da zestum ar beradou
Eus ar goad precius
A zirët, evel pizennou,
Eus a gorf divin Jesus.
O consideri e anquen
Ac e c'hlac'har diremet,
Dre zaelou eur guir binigen
Desquit goalc'hi ho pec'het.

Amen.

PEDEN DA JESUS

ER JARDIN OLIVET

VAR TON : *E tal ho croas, leun a anquen.*

O va Jesus ! evidomp-ni
Beuzet en affliction,
Oc'h eus souffret un angoni
Din a bep compassion.

Jesus ! Jesus !

Ni so caus eus ho melcon :
Pardon, pardon, va Jesus !